

---



---

 AL LORC'H HAC AN OSTELERY

*Diou sourcen a baourente*

**EN BREIZ-ISEL.**

LODEN QENTA.

**SERMON**

AR

**VOMBANCERRIEN.**

---

Biscoas ne oa guelet un amser hanvel deus an amser so brêma o rén : ed n'en deus cas pelec'h ne glevfed coms nemet deus famillo rouinet. Ne ve qen caus nemed deus tud êt da baour : 'hen a 'hen è prest ar versediguez da vont var e dreo; en ty 'hen a 'hen so muyoc'h a 'hle evit a peadra; 'hen a 'hen so amarret, garotet, erreet quasi qement tam leve en eus. Gand petra eta ê amarret a garotet evelse ar peadra? Æset oalc'h ê goût: gand billejo obligation, contrajo arhant hac hypotheco.

En amser-ma ar brassoni a discar calz a dieguez ac a laca meur a famill da dissirita. Un nombr bras a dud a deu da vea foulet goude hea bet er brospérité, a petra ve caus nemed al lorc'h, nemed an dispigno diræson a reglet fal.

Laqêt e peus, me suppos, un dornad mat a

bezio ugent realet da brena un habit a lorc'h  
 d' merc'h : ar'hoef montet so var efen so coustet  
 seiz scoet ac ar mouchouer bras so e'holo  
 e diou scoa qement al, e roben a dal pemzek  
 scoet, priç un anvoer vlaz ; a cetu goude an  
 dispigno sot se ne peus qet eno menaj ar pes  
 a faut ac e'hoc'h bep dez en ty o amezeyen o  
 /h'amprest binvio pe loenet d'obero labour. A  
 ne vije qet proproc'h dec'h tremeno merc'h  
 gand un habit muic'h dister a caet eno craou  
 eur vuc'h mad d'al læs a d'an aman, couit da  
 gaët dour da dibriho poed ac un avalik poac'h  
 da leda varo tam bara rous?

'Hoarveout a ra dec'h rei eur fest a vombanç  
 a plaça Viçant (an orgouil) er pen huellan an  
 daul a cetu e renqed tenna gle ; manet è ar  
 gouin ac al liqueurio da bæa, ar'hibik so qerhet  
 var asten. Red è dec'h ampresti ar'hant, fournis  
 interest mat ac ouspen pedi ar greançourien da  
 dont da dafa ar frico, a'hoas vo rabat dec'h/o  
 lezel en pen izellan an daul pe autramant e  
 voelfed an huissier o tispaca varnoc'h damprest  
 goude ma vo achu an termen evit ar bæamant.  
 Marteze e sonjo dec'h tremen er'hiz se evit un  
 den a beadra yac'h a gallout fortuni guelloc'h  
 /o pugale. Allas! tremenet è an amser se. Evit  
 guelet un daul o plega dindan a bep sort meu-  
 zio delicios den na deu da gredi e ve leve dible  
 ebars en ty; er c'hontrel è. Gilaouet o mignonet  
 pa voint o retorn deus o lein vras hac e clev-

fed anê gant o'haus : pebeus pred so bet ase, a lavaró unan; — domaj ê, e me un al, ê bet al lein se var'hle; — guir oalc'h a lared, e me un drived, ne peus-hu qet guelet brêma souden deus taul'hen a'hen a'hen a'hen, ar re se ê pauret an a'hant bras, ar re se neus sicouret ober difraeo ar fest.

Ar greançourien deus o'hoste a vo trist en eur vont d'ar guèr; côz a vo fen o sonjal en o a'hant ac an hini anê a neso un tam compræneson a laro enna e hunan : meus aoun e ma ar reont o prepari fonta o handeuden; bea meus un tam disfi; daoust pegouls e hachu an termen. Mont a ra er sul varlerc'h da gaët an hini so dleour dean ac e lar : clevet e meus un dra benag a ne blij qet din; eom e meus deus ma a'hant. — Oh! e me eguile, ne peus qet eom da gaet doan, pæèt e vefed; rêt vo dec'h gortos eur pennad'hoas qen a vo guelet ac en haïo an ed araug; bea meus un eubeules vlaz da versa p'aruo foar Viqèl. — Mes scouiza rer o'hortos, mont a rer da gonsulti an avocat; an avocat a lar : poursuived, poënt bras ê. Imbannet ê ar vers a var ben fin an dro ne digoe d'ar greançourien nemed an drederen deus o a'hant. Honnes so eur figuezen! Paut e brejo bras goude se a renço ober bouellan voan ac ar re vo bet e sicour anean da foeta e dreo ne deuint qet d'en sicour da bæa e'hle.

Lezed o peus/pugale re diveat er scol a

brêma ne 'houllont qet lacat o 'horf da bega deus al labour.

Ne noûn qet pegueument a dud divar mæs collet gant ar brassoni e neus poâhet o bis o 'hober autrone a dimezelet gant o bugale; o bugale êt da autrone a da dimezelet a leze o zad ac o mam er guèr da derri o 'horf evit dastum dê peadra da bourmen o disqamant inutil ebars en cariolen. Ne voar den, e me an tad, pegueument ê coustet din ma mab entre mê bet er golaj, a cetu gant e ol disqamant n'ê qet capabl da 'honit eur pret bara. — Aboue m'ê arru ma merc'h deus ar goüent, e me ar vam, na briç ober manœuvr ebet; dalc'h mat e ve o vroda pe o h'ober faus fleur; en pad an dez ne ra nemed plega a displega e dillat; ia, an dillat se a ve sellet a tennet deus ar prés (ar c'hontouar) evit o bronça ac evit o h'aveli. Ar frizetten ac ar gollinetten, pa vent bet eur veaj en e'her'hen, vo red o'hanna ac o ferri, a cetu e'ha eur som spontus, en pad ar blaz, evit prena saon ac ampez. — Pa deu eur paësant benag evit e darempredi, ve faë ganti e velet; rèd vo dei dimei d'eur bourhis, mès me, e me an hini gôz, ne'houllan qet guelet ma merc'h o vont en kèr, rac doan e me e teufe da foeta e zranten gant paut e leviten.

Da biou ê an ty bras nevez se so duont? — Da 'hen a 'hen. — Couscoude an den se n'ê qet guel pinvik; petra eta so bet caus deân da

versa goëllan pes douar a nefe evit sevel ar  
 'hastel se? — Ato evit ober fortun e vugale? —  
 Mès pa vo qestion goude e varv, d'ober ar par-  
 taj entre e bevar buguel, an hini a digoeo deân  
 an ty ne nefe da staga deus e dy glas bras ne-  
 med eur braden, eul liors, eul lannek a peder  
 pe bemp besqel deus eur parq. Petra raio neuse  
 gant ar bern mein se? — E versa ; netra qen.

Ar baësantezet còz ne lùhe qet an tu dia-  
 vès deus o meublaj evel<sup>to</sup> re hu, mès an tu  
 diabars a rê muioc'h a drous, rac eno e vije  
 iañhodo mat a bezio daou scoët o'hortos an oc-  
 casion da brena ar parq mâ pe ar velery se pere  
 e peus hu guerset pe a verso<sup>to</sup> pugale var<sup>to</sup>  
 lerc'h evit souten o lorc'haj. Kaër ve chassa a  
 bonta var an tiretenno ne sonont qet, nan,  
 chom a reont sioul a didrous rac peurvuian  
 e vent goulonter.

Guech al pa antreè un den en ty var mæz ne  
 vije qet clevet ar mestr o laret ar c'homzo mâ :  
*passer dans la salle*; bed ar vadelez da dremen  
 ebars er sal. Ar re gôz n'anveent qet ar sort  
 langaj se. Bea vije en ty e qenta eur gabinet  
 dû a tefal pelec'h e vije servijet dec'h a galon  
 vad eur plajet mat a guik ; an tam bara a ser-  
 vije d'assiet ac ar meut da fourchetez, ac evit  
 peurvega an tam qik a bara se e vije laqèt eur  
 scudellet vat a gist. Elec'h er salio so brema  
 e ver dijervijet en aour ac en arhant ; ne debrer  
 nemed meuzio en guiz kèr a ne efer nemed

liqueurio deus ar re ar muian delicias.

Divoalled ne dremenfe dre ar sal an a'rhant necesser evit prena teil da demzi<sup>o</sup> parqo pe loenet da'hreia<sup>o</sup> crevier. Guech al ar mestr ac ar mevel a debre deus ar memeus coter goude bea labouret ar memeus parq. Elec'h'houy a fel dec'h tremen tud o ty gand o timorancho goude bea coufonet danve o bevanç ebars er sal. Divoalled ive gant ar sal se da zisqi do pugale e nem rouina. A bea defo hi, peb hini anè, qement a leve a'houi evit heuil an trein e defo guelet ganec'h? — Ne defo qet; neuse e vanq dec'h disqen<sup>o</sup> cramaileren deus un dant pe daou, pe autramant mamzel ar baourente arruo prest var dreujo<sup>o</sup> dor evit o digaç ebars en hent rez.

*HO* tud còz ne daseënt qet qement a frigo a 'houy a couscoude e vijent qen yac'h a 'houy, ia, a yahoc'h ive mil guech. Araug ma voa deut var maes ar festo a vombanç e vije tud nersus, tud yac'h evel ar 'hloc'h, tud livet kaër ac a chome son en o sa bete pevar-uguent bloaz, elec'h brêma ne voeler peurvuian nemed tud poatriner pe bourmonik, tud livet fal a gratet o zamperamant gant an druoni ac an aman rous.

*HO* tud còz ne guemerent qet o repos var goe-  
leo acajou pe vodegai a ne dije qet a blun da  
souten o fen en pad o'housq, mes ar re se a  
gousqe didrubuil var o zamik pel. Ne vijent  
qet tourmantet gant unvreo desagreabl, nan,

ar re se ne seblante qet dê dre o'hunvre goelet  
 ar greançourien o tont da'houlén o arhant pe  
 an huissier en em bresanti evit comañç laqat  
 ar vers.

Bep dez e ve clevet eur vam imprudent  
 benag o coms er 'hiz ma deus e merc'h :  
 'houy neus qement aës a merc'h 'hen a'hen  
 da gaët eur mouchouer scoulmet ; 'houy so  
 couls a honnes a me intent dîn po ive eur  
 chal tartan ; bed fur, ar sort a'hoantefèd e po ;  
 mar-gal bea pæët ar mecanik e po un habit  
 nevez ; pa man ar re se var an ton se e hallan  
 ive caët dec'h ar sort e deus ; ne bermetin bi-  
 qen e hafent arauc dec'h. A cetu var ar sort  
 digareo se e vo foëtet ugent scoët, hep goût  
 d'an tad, da brena dillat d'ar verc'h. Qementse  
 ne vo qet dies d'ar vroeg, rac ganti e mân al  
 lin, ganti e mân an aman, ganti e mân an ed.  
 Roët vo eur palefars kerc'h d'ar miliner var  
 digare e gaç da graza ; aru ê tano an ed ; var ben-  
 anter ar bloaz e vo ar'hôq o cana ebars er'hri-  
 gnal, rac bea ê goulonter a bep sort trevad.  
 Damprest e vo guelet adare ar sâh o retorn  
 d'ar marhat evit adprena kër ar pés a vo bet  
 guerset en donèson. Pa ne vo qen a arhant e vo  
 laret d'ar miliner : ed da dy Vari-Von an Dù,  
 honnes so camarades din, honnes a royo din  
 eur sam ed da nevead evit gortos an est. Mari-  
 Von au Dù pa vel ar miliuer o'hantren a ra  
 diountân eur sel a dreus ac a lar : aru ê ar sâh

se aman adare? Petra! o prepari mont da baour e ma an dud se? Serret, o keno, eme ar miliner, merc'h<sup>o</sup> camarades so vont da dimei d'eur paut deus coste Lannuon; disul ar pen sun ê laqêt devez ar veladen; bed eta sioul gand an doan da noaz d'ar fortun; goude ma vo tremenet an euret ne vo qet qen riskus comz, rac var ben neuse e vo bet nasqet paut coste Lannuon. Ahanta eta! a n'ê qêt er'biz se e ve truqet a qibet ar gristenien!

Pa dimefed, divoalled ne chomfe an habil eured var liben e'hein, var gaïer ar mañhadour.

Louisik so mab d'eur feurmier ién ac a fel deân'heuil bugale an den a beadra yac'h. Evit bea greïet kaër ne ra nemed taga a tourmanti e dad. Ar paut côz scouis eus e glevéd a ya da gonsulti e vroëg : Mari-Jeann, e me ân, petra vo grèt deus Louisik, ne bad den gantân fot caët dillat nevez; laret a ra e'haïo dibar om zro a penos a refomp, rac me ne non qet capabl evel goech all; mès penos a vo grèt da bæa? — Ne non petra d'ober, e me ar vaoues côz, petra fel dec'h, red vo caët deân, n'ellomp qet tremen ep ân.

Mès prest goude e aru quartier goël Ian ac an arñant vo bet dispignet en ty ar mañhadour ne vo qet caët da gaç da dy an outro. Ar paut côz so adare nec'het : Mari-Jann, e mean, poënt è mont da bæa an outro; pelec'h e kefomp nin daou'hand scoed d'amprest? — Ed da dy an



negociant, e me an bini gôz; marteze e momp un tam ar'hant digantan var nevead. — Mancout a ra dimp daou'hant scoed. — Ia sùr, e me an negociant, bea po, mes gant ar gcondition e refed din, o'bed dek guennek dindan; pa neso an dud al dek livr'houy ne po nemet tri scoed daou real. — Aruout a ra an est, an negociant so difun, ac entre ma ê izel ar'hour e ra diguemen d'ar paut còz dont en kèr; — hastet dorna, hastet guentat, eomp bras e meus ed; — a cetu var ben ma vo huel ar briç e vo qasi pignat est ar feurmier en grignal an negociant.

An outro pa vel bugale e feurmier gouisket qen kaër a deu da sonjal e mâ ar plaç re var'hed mad. Qenta lizer vo grèt, e meân, vo red caët kresq ac en tuont un dornad mad a vanego. Ar baësantet a ra~~o~~ fortun divar om'houst; selled peguen kaër greïet ê~~o~~ bugale; ar melærio so qasi evit netra.

A'hanta! me ne feurmfen qet un erv douar d'un den ac a vije e vugale re var an ton bras, doan e mije ne vije de'hradet din ma flaç araug fin ar respect. Rac pa ve bèr an ar'hant ebars an ty e ve bèr al loënet ebars er'hraou, a bèr an demz ebars er parq, a cetu var ben ar fin an douar na brodu nemed louzou, a helvezen, a ne vè qet mad da blanta chass.

An dud a beadra, dre o faus dispigno, a defe en dro dê menajo diguempen. Ne ve aës na d'a rei labour na d'ober an aluzon.

Red e ve der'bel qen stea var an treo evit pæa ar farodiaj, mar so'hirie en calz-a dye pin-viq eur bansion fal fin : bara trenq; bara gros, leun a vren, grèt gant hey rik', bara panen a menaget gant ar forc'h; iôd put, silet pemzek dez a ve, iôd dre dour, iôd faout a divlas pehini ne ve nac en e stum nac en e fæçon; cram-poes dilibris, dispegued gant un tamik bian a lard memeus da voener a da sadorn; souben dreut grèt gant eur vrigoncen vlong. Elec'h lâha daou loën ne ve lâhet nemed unan ac evit espergn ar'hik e vo roet d'ar iaou da nos un tam caoulet da goân, en ân pa ve al labourio startan o rén var mæs. Guech al en dezio vigil e vije en tye mad iôd dre læs, a brêma, abaouë ma ha al læs en kër da bæa al lorc'haj, e renqer chaqat avalo douar gant eur bannac'h dourgist pe eur bannac'h jamezen.

Domestiqet, mar guê greïet kaër bugale, o mestr e cousto kër d'ha l'èr ha d'ha h'estomaq : sevel abred a mont da gousqet diveat ac evit bara an treo se eur bansion discord. Ia, grèt vo dec'h souten eul loden deus ar frejo a goë ebars an ty.

Mar carje ar mæstro træti o domestiqet un tam guelloc'h na dije qet qement a digare ac a hast da vont da gresqi arme ar glasqerrien vara.

Couscoude, domestiqet, ne meus tam truez abet diouzoc'h rac 'houy o'human so caus d'ha

maleur, rac kaër en deus an dud a beadra caët treo faro ne nint qet capabl da en em differanci diouzoc'h. Ar vates a fel dei mont en kefer ar plac'h a dy a den n'al anveout ar mestr deus ar mevel. A boan e ve achu ar bloaz e ve cals a hast da gaç an tamik govr d'ar stal veser.

Guech al ar servijerrien a nije dillat simpl a solitl grèt var steun ar guèr ; an dillat se a vije padus ac a harse deus al labour, e lec'h gant an treo stipet a brener brêma e ve confontet ne voar den pegument arhant, a'hoas ne vent qet capabl da divoal deus eur bar dour. A goude tout ne vâñ netra evit caët lienaj : dindan e ve eur rochet toul a var'houre eur fraq a bris huel.

Guech al an domestiqet ac an artizanet ne thoneënt qet qement arhant a'hirie, a couscoude var ben dimei e dije cals a dreo dastumet : eur zolieret lin, arhant placet, eur vuc'h pe diou, denvet pe voënan var anter. An treo se a rè cals a lanç dê da sevel o bugale. E lec'h brêma an domestiqet na defe netra pa dimeont, na defe na guele, na balin, na nincel; prest goude an euret e ha an habit nevez ac an alliañç arhant da dy ar revanderes, a na ve na bara var an daul na tan var an oalet.

Ne voeled-hu qet ar mevel se? peguen faro ê! Er sun dreimenet ê bet ar c'hemener pevar dez o'hober deân eur vesten. Hennes so greïet! Ia, ac e dad n'eus qet un habit propr evit mont d'an oferen bred da sul. Selled deus Jonanik an

ty al, honnes so stad enni; ne neus nemed tri bloaz aboue ma mân o serviji a cetu dija e deus bet eur mouchouer stof. Ahanta! lered din, a ne vije qet proproc'h da Jonanik an ty all caët eur mouchouer muioc'h dister a miret un tam arhant da brena teir pe beder goalen vougacin d'ober invizo de mam pehini so en noas?

A'hoas domestiqet ma ne dispignjec'h evit en em'hreia nemed ar pes a'honeed. Mes laërret ve dra pe dra qeid a ma ve troët qein ar perhen; ia, laërret a ve betek an'hern deus treidar'hezeq a memeus betek an uo deus dindan ar iér. — Amân, e me ar vroëg, na deo iar abed; mont a ra an uo tout gant al louarn. — Ia, gant al louarn daoudroadeq.

Ar vugale a dy so æsetoc'h dê goada ialc'h o zad pe filoutat un dra benag deus ar menaj. Ia, pa ve èt an tad pe ar vam d'ar foar pé d'an enret e arruo eur baoures var digare qestel eur ban-nac'h læs ribot pe ar stoupaer var digare guersa pabu pe brena pillo, a var ben m'arruo ar re gôz er guèr e vo disparesset deus an ty ar'hik sal, al lanvnes a beteq ar bleud kerc'h deus ar barillo. — En dre man, e me ar vam, n'eus grèt amplèt abet gant ar palefars kerc'h mân, me gav ê guel goahet ar'hosteio qik aboue eur pennad so. — Rêson o peus, mam baour; ato bet ê ar verc'h o renabi an dreo deus<sup>o</sup> menaj.

Tado a mamô nê qet epqen<sup>o</sup> peadra eo a ya gant<sup>o</sup> pugale. Kaç a reont'hoas gant<sup>o</sup> h'eü-

rusted, /o y'hed, /o prosberite ac avijou /o puez; rac ar chagrin ac ar boan speret a reont dec'h a sicour anoc'h da disqen en /o poul araug ar houls. Evelse ive pa velan un assamble a dud iaouanq greïet kaër e ha fal ma'halon pa sonjan en daëlo, en néhamancho, er'homzo divergont er blasfemo, el laëroncio ac er péhejo a bep sort a so èt da brena ar farodiajo se. Ia, mantret a rannet ve ma'halon pa sonjan er vam se so bet contristet, pa sonjan en tad se so bet insultet, pa sonjan er goul mikæl se a chomo da bæa, pa sonjan er versediguez se so prest da diguerri, pa sonjan en disenor so prest da goean var qen alies a famill respectable; ia, an disenor! rac an hini a neus ar'hant d'ober trouzal en amser man ne chôrn dôr serret abet dirazân na hini an ty na hini ar galon.

Peurvuian an den a lorc'h a ve paour en pep fæçon, paour a vertu, paour a beadra, paour a speret, paour a garacter, paour a bep sort qualiteo mad. An doalotten sclær se eta a so en dro dec'h a so gaouiat rac laret a ra en e guiz : an den man so pinviq ac en paour. Ia bonbancerrien, qen alies pes dillat so en drô dec'h so gaouiat /o frak a briç huel so gaouiat /o prago barennet so gaouiat /o tog kern huel so gaouiat /o montr ac /o chaden vontr so gaouiat /o chal tartan so gaouiat a betek ar groas aour so en /o kerhen so gaouiat.

Martese e sonj dec'h tremen evit tud pin-  
vik var digare mar tougued un habit a decor.  
Allas ! en em distrompled. Aboue un toullat  
blavejo so bet guelet qen alies a den anter  
rouinet, qen alies a vangroutier e n'em débiza  
evit gallout affronti e nissan ma ne neus con-  
fianç abet qen ebars er sort tud se. Paësantet  
divoalled deus ar re a ra o fortun en un taul.  
Var digare mar gueled un den o tibri frico,  
o vont en cariolen ac o touguen eul leviten  
ne pe disfi abet anean. Petra eta ? Ne n'ouzoc'h  
qet un dra : en toes ar gommerçantet an hini  
a ra affero mad a ve greïet kaër ac an hini a ra  
afferio fal, evit rei da gredi e ra afferio mad,  
a ve ive greïet kaër.

Tud divar ar mæs, pa po eur som benag da  
blaça comprened ped den so bet rouinet a  
nevez so gant banqrouto ; a pa po trevad da  
versa ne discrogued qet deus tra araug  
ma vo bet ar bæamant. Mar be red dec'h,  
roed o'hed un tamik guelloc'h ma'had, gant  
ar gondition e tevio arc'hant a'houy assam-  
bles d'ar guër.

Pautret iaouanq, lezed ar merhed a stad da  
gundu o lorc'h en pad o buez, couit da laqad  
re al en diæzamant assambles gantê, ac accor-  
det ar plaç qenta eno preferaço d'ar merhed  
simpl a modest. Dindan ar simplicité e kefed  
ar peadra yac'h, dindan ar vodesti e kefed ar  
furnez. Pet den nevez dimeët ne meus qet

clevet o laret din : 'houy sonj dec'h, outro, e meus me grèt eur fortun gaër o qemer merc'h hen a'hen, a couscoude e meus grèt un dimei dister. Guir ê en ty ma zud kaër e oa un tampion eston, pa hen da velet danfe ma groëg e vije grèt stad anon ; eno e vije frico, gouin, bara guen, ia mès dindan al lorc'haj se e oa berniet calz a'hle, a mar carjen bea èt d'an hypoteco e mije guelet sclær e voa amarret au diou drederen deus peadra ma zad kaër gant banq Sant-Malo a hini Montroulez.

A'houy, mēhed difetet, piou e peus hu sonj da dromplan gant<sup>o</sup> toaletten ? Eur paut diveat benag ? Ia, mès n'eus cas peguen bajanek e vo<sup>o</sup> pried ne vanqo qet en dezio varlerc'h an eured da'houlen diganec'h : pelec'h e èt ar'hostezio kig sal a voa deus ar scour en devez ar voeladen ? Pelec'h e èt ar bossado neud a oa a divil deus an treust ? Pelec'h e èt ar'har malbrouk a oa ebars el loch ? — Da dy o ferhen.

Tud iaouanq Breiz-Izel poënt bras ê dec'h chanj a gundu, da viana ma ne peus qet a'hoant da velet ar vro mân o vont da baour râz. Ar simplicité epqen a laqo ar brespolite da retorn a nevez flàm ebars er famillo.

Tud yaouanq pinviq, 'houi surtout, en eur rei'haul d'ar'hizio nevez, c'houi a so bet pen caus da guement a valeurio en toes an dnd. Mès mar qered e nem vouisqa gant modesti

cals deus ar re disterroc'h evidoc'h ne van-  
 qoint get do'h'imita ac evelse e rentfed d'ar  
 vrô mân eur servij incomprenabl ac e vo en  
 gueno an oll dud furzo cloar ac/o meulodi.

FIN.

**Pour paraître successivement :**

SERMON AN OSTALERIO. (Paraîtra en janvier.)

SERMON AR VEVENTY.

SERMON AR MERHET YAOUANQ EFERESET.

SERMON AN AVOCADET DIVAR MES. (*Les demi  
 Savants et demi Incrédules de campagne.*)